

CHANSON

Potret Plouillau

Var ton : Adieu Pontreo

M'am bije speret da gomprenn, evel a meus fantazi,
Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi
Eur c'himiad leun a c'hlac'har, gret dar gonscrivet yaouanq
O deus tennet ar billet ebars er blaves prezant

Ebars er bla mil niz cant c'hoec'h, ar bemp a vis guengolo,
E zeo digueet adare eus a barres Plouillau
Tud yaouanq evit an arme, tud deus an terrupla ;
Glac'haret eo oll ligne, p'o guelont o partia,

Da bartia gant an actif ne zeus quiet nemet pevar ;
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar Maledar.
Ha Yannic Prat, eus ar Goajou, ha Pipi an Aveant :
Pevar den eus ar re vrava, corfou kor ha tud vatllant,

Ervoanic Jacob a lare en daiz-se d'he gamarad :
Emâ a zo eun devez trist hac a ra din calonad !
Guelet va mam baour o vouela, ha va zad kës desolet !
Va c'halonic ebars em c'hreis zo dija casi rannet

Kals a sonchfê dê, marteze, pennos e vent eur poultrou
Em he aoun rac eun ten fusuil pe rac eur voulet canon
Pe otramant aoun rac ar fatig o vale dre an hentchou
Pe gousquet var eu guele gant ebars er c'hordgardou,

Douguen va dillet var va chouq, va fusuil ha va zabren,
Bale bemde a guer da guer dre ar fanq hak ar vouillen
Ha goude e fin va beac'h, rencout marteze campi,
Pe gousket var an douar ien, pe otramant bivoaki.

Tor o deus an nep a sonch-se ; ma c'haljet lenn em c'halon,
Evit gwelet va bolonte ha va inclination,
Ma ne fotje nemet va goad, me en seuille tout joaüs
Evit souten eun Impalaër eun tad ker carantezus !

Piou na gombatte ket gant eun Impalaër christen ;
Eur gaus ker just ag e hini, zo facil d'a souten,
Pa zomp memprou da Jezus-Christ. soudardet an Aviel,
Bugale da Zouë an Tad, templou d'ar Speret-Santel.

Arça eta, camaradet, ken quittaad euz om c'homtre,
Demp ni da ilis Plouillau ar supplia hon Doue
D'hor preservi demeus goal chans pa vésimp en armeou
Ha da gonsoli, bars ar guer, hon taidou hag hon mamou.

Adieu dec'h, Autre Sant-Millau, patron euz ar barouz ma,
Adieu kerent ha mignonnet, cessit bremañ d'a vouela.
Pedit Doue hag ar Verc'hez, da gavet soign ac'hanomp,
Hac hon Æl mad d'on c'hondua partout elec'h ma zefomp.

Adieu, va mab, va esperans, eme an tad desolet ;
Piou a gonsolo va zud paour, goude ma vi partiet ?
Pa vin accablet gant cozni, me vo clevet o laret :
Ma vije ma mab kez er guer, en dije va soulajet.

Clevit ar vam o quiniadi ive digant he buguel ;
Deuz ama c'hoas, ma bokin eur vech kent evit mervel.
Aben ma retourni d'ar guer, me vo ed euz ar bed-ma,
Deus aman etre va dioubrec'h evit ar voech diveza.

A guichen at moment fatal ma c'heus tennet ar billet,
Beb noz vel ma fot din kousket, me a seblant da velet
O tont deus enr gombat sanglant var eur chariot bleset
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonnet.

Ar zoudard yaouanc kontristet c'hoas ken evit partia,
Evit essai o c'honsoli a lavar en eur vouela :
Tavid va zad ha va mam baour, ha bevit en ezperans,
Doue, tad a visericord, a zo hras e brovidans,

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,
Gras Doue gar ar Verc'hez, e vezo fin do clabar
Evit merk eus hon vaillant, gant lore deuz hon tocou
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hi o taclou.

Adien da baros Plouillau, ha de holl habitantet,
Adieu d'hon oll anaoudegez, ha kerent a mignonnet.
Ha ma na memp ket ar bonheur er bet-mañ da em velët
Gras deomp ebars er barados assambles da em gavet.